

# KIMIADOU EUR MARTOLOD A VREIZ

## CHANSON NEVEZ.

Var ton : *An drouc-hirnes* (le mal du pays). *Cetu ar fik a fok.*

Bretonet, me o ped, didostet da glevet  
Eur himiad truezus, eun adieu trist meurbet  
A ra de guervois quen monet d'ar brezel  
Eur martolot yaouanq maguet en Breiz-Izel.  
An eis-varnuguent a viz maë me oa en faction  
Oar bont ma batimant bars er rad en Toulon,  
O hortos partia vit mont d'an Itali  
Oar ben tri de goude, e cleemp ambarqui.  
Me gred a oa tremenet an eur a hanter noz  
A ma hamaradet oa et da repos;  
Netra na drouble neuze ar silanç deus a noz  
Met ar mor e varmuri gant eur voues rust a gros.  
Ma daou sorn a oa harpet oar ma c'harabinen  
Dindan ma sreid ar mor bras ac an eny us dam fen  
Heusi ran wignonet pa deuan da gompren  
Na ve tre'n den ac ar maro nemet treus eur planquen.  
Pa n'em velis ma hunan oar bont ma batimant,  
Ep test deus ma glahar, nemet ar firmamant,  
Me gommances hirvoudi gant glahar ac anquen.  
Pa deus da jong din a baros Trabrien.  
Ma daoulagat oa troet oar su ar vilagen  
Lee'h a ma da guenta gulet ar selerigen;  
A pa deus da jonjal em herent ac em bro  
Gant an dour deus ar mor n'em vesque ma daero.  
Aboue an deses fatal a meus renquet quitta  
A dont da guimiadi deus ma mam a ma sad.  
Bep nos pa ve consquet em huave o goçlan  
Ac o jonjal 'n o glac'har nos a de a ouelan.  
O devez leun a c'hlahar, o sisesper c'hoëro,  
O devez déplorabl a carguet a canvio,  
O quimiad anqueniis a glac'harus meurbet  
Me mo jong ahanout queit a vin oar ar bed.  
Gant ma herent er guer e ma nehamant  
Hi ra ma oll chagrin a ma brassa tourmant  
Penoz annonci de tian breman d'ar brezel  
Aoun meus d'o lacat gant an nec'h da vervel.  
Pa glevont quement se a devont calonad  
Goasoc'h vit an devez a renquis o huitaf  
Ac hi devo courag a balh vit gallout supporti  
Ep ma ranno o halon gant eur d'hele quen cri.



Houi speréjo evurus, o saent a saenteset,  
Itron-Varia-Drue, ma guir vam biniguet,  
Reit de ners a courag en o affliction,  
Reit de o hassistanç, confortet o halon.

Pelec'h eo et breman querent a mignonet,  
An amzer-se quen douç hac agreabl meurbet  
I'elec'h ma et breman an amzer eürus-se  
A oan en Trabrien a no loesq benide.

Niget e pel d'ouzin an amzer quen eürs  
A oan sables guenac'h, camaradet joaüs,  
Tremenet e vidon, marteze vit james,  
Ar bonheur ac ar joa m'emp tanvet assables.

Pa sei an nevez amzer da gargan adare  
Ar guez a vleuo caër ac a selio neve  
Pa seui e oar e bis ar guenidel er vro  
Na nimp muin assables beb sul d'ar pardonio.

Pa oan en o touez oan joaüs a laouën,  
Mes breman on mantret, sionas ! gant an anquen,  
A ma oll fljadur so bout neur plaç disro  
O sonjal gant glahar em herent ac em bro.

Houi a velle breman Yvonie o mignon  
O pourmen e hunan oar ar rad en Toulon,  
O pourmen e unan alies tal a nod  
A daëro e zaoulagat a red var e siouchod.

Me ve c'hoas alies aseet oar eur roc'hel,  
Ma daoulagat troet evar su Breis-Izel,  
Mantret gant ar glac'har, a beuet em daëro,  
O sonjal em herent so er guer en canvo.

O douar a Vreis-Izel, o ma bro biniguet,  
Pegouls a sono an eur ma c'hin c'hoas d'ho kuelel ?  
Pegouls a erruo ar momet ac an de  
A seuio da laquet fin dam c'haptivite ?

O devez leun a souzter, devez a eürustet !  
Me so chonjal enout beb heur a beb momet ;  
Doue trugarezus, hastet ar momet-se  
Ma hin c'hoas da velet ma bro a ma c'hontre.

Tre ma oan o teplori oar bont ma batimant,  
Ar loar a darsas souden ebars er firmamant ;  
Neuse me a velas us d'am fen o nijel  
Eur guenidel bian evar su Breis-Izel.

O ! prest din me, conic, prest din da sivesquel  
Ma ningin eu ez plaç da bete Breis-Izel,

Da gonsoli ma herent quent vit quitat ar Franç,  
A da gas betec eno comsou a esperanç,  
Mes allas! me n'allan quel veldout treuzi an ser,  
Me a renq chom aman evel eur prisonnier,  
Evel a oa guechal an Israëlitet,  
Pel amser o hortos an douar prometet.  
Martese feus, eonic, scuisset da sivesquel,  
O nijel dreus d'ar mor, o tont deus eur vro bel,  
Pleg eta da esquel a so bet pel digor,  
A repos eur momad en quichen map Arvor.  
Disquen eta, eonic, eur momet en c'hichen,  
Ma scrivin eur lizer da gass da Dabrien;  
A pa meus quet veldout ar bonheur dont d'ar guer,  
Te vo da viana vidon eur messenger.  
Querquent evel ma vi digaoet en Breiz-Izel,  
Te vo, eonic bian, ma messenger fidel;  
Te rei ma gourhemen er guer pa errui,  
Ac a laro dam zud a han d'an Itali.  
Grit ma gourc'hemeno d'an tad neuz ma maguet,  
Mes allas! da mam baour, da honas na ri quet,  
Rac boe zon partiet demeus a Vreiz-Izel;  
Eouet da jouissa deus ar gloar eternal.  
Lar adieu d'am breudeur a d'am c'hoarezet,  
Goude d'ar belec coz a nevens ma badeet,  
Na ancoué hini bet demeus ma mignonet  
A lar de a sonjan enno en peb momet.  
Lar de, eonic bian, pedi vidon bep nos  
An Itron Varia, patrones ma faros,  
Ma teni d'am preservi en creis an dangerio,  
A ma rai din ar c'hraç da retorn c'hoas d'am bro.  
Mar a teufe dit c'hoas, pa vi en Breiz-Izel,  
Rancontri eun deves ma mignonos fidel,  
Lar dei a fo guelet Yvonic e mignon,  
Hober gard eun noves oar e lest en Toulon.  
Assur dezi er sad, dre broposiou touchant,  
Meus bopret eviti eur garante ardant;  
Lar dei a ha breman ma c'horf d'an Itali,  
Mes ma c'halon a vo da virviquen ganti.  
Pa zeï a neves amser te a iel alies  
Da gau, da fredoni, da guichen bi frenés;  
Perac ne allan me nijel eur rec'h guenoc'h  
A mont de saludi betec e zi vel doc'h!

Mes gra ebars em flag, a lar del dre da son  
 Derc' hel jonch da viqueu demeus e guir mignon,  
 Pec'hini zo, allas ! pell deus a Breiz-Izel  
 Eu eur lest, qar ar mor soiet gant an ayel.

Pa vin en Itali ca creis ar c'hombajo,  
 Creis an tan, ar mitrailh, a cros ar ehanonio,  
 Neuse eo a tenu ar muian da jonch din  
 Deus an amzer eurus so nijet dell d'ouzin.

Mar teu din da vont siet gant eur boulet traitour,  
 Ac achui ma deho en eur vro estranjour,  
 Neur gouean d'an douar c'hoas quent evit mervel,  
 Ma daoulagat a droo evar zu Breiz-Izel ;

Ma daoulagat a droo evar zu Breiz-Izel,  
 Da laret d'am c'herent e adieu eternel,  
 Da laret d'am mignonnet an adieu diveza,  
 A quen ar bodheur d'en em velet bars ar joa.

Mar a velit eun de noir len ar gazeto,  
 Ma hano siouas din voar battin ar maro,  
 Querent a mignonnet, c'hai laro gant glac'har,  
 Grao dean digant Doue da repos bars er gloar.

Quent evit finissa goulomp digant Bone,  
 Vit ar martolot quez hej sort prosperite ;  
 Pedomp a vir galon Roue an armeio  
 D'em preservi en creis quemeat a dangerio.

Ollromp c'hoas on vouto da Stereden ar Mor  
 Vit an oll soudardet deus on bro gar Arvor ;  
 Goulomp gant confianç, pedomp hi gant ferveur  
 Da bellat dioute pel goal chaoc a goal heur.

Rentomp meulideguez da arme gier ar Franç,  
 D'non Prinç quen generos a leun deus a vaillanç,  
 Pere guita o bro vit mont da gombati,  
 Evit indepeadanç oll pobl an Itali.

Canomp breman n'eur vones, canomp tout assemble  
 Ra vezint enoret a mentet da james ;  
 Canomp ta, Bretonet, deus fons on c'halon,  
 Gloar ac enor d'hon arme ! viv Napoléon !

Neb a neus eompset ar son ma pen da ben  
 So ganet a maguet en paros Trabrien,  
 A neuz he c'homposet qar an tou di c'hana,  
 Ganet-hi ta, Bretonet, vit n'em divertissa.